

Gavotte de Saint Renan

Trad.

♩ = 120



... à la quarte



QR-Code du MP3



Notes: Partition pour piano

Transcription: Hubert Jumel, décembre 2007 (hubert.jumel@gmail.com)

Gavotte de Saint Renan : Ar pilhaouer

Chant traditionnel

Marivonig zo dimezet, gant ur flaerius pilhaouer (2w)

E Lokeored ez eo ganet, e koumanant Toull-al-laer (2w)

Foei, foei, foei va zammig aotrou |
Gant e stoup hag e bilhouè | 2 wech

Tri devezh goude va eured, e oa foar e Landerne
Ha va lapous prim dihunet, sailh er-maez eus e wele

Drailhañ ra un hanter pater, tanañ ra e gorn-butun
Tapout 'ra e grog pouezer, da bourmen 'hed ar sizhun

'Hed ar bloaz koulz eo lavaret, 'vez atav o redek bro
Hag e lez e wreg glac'haret, er gêr da skuilhañ daerouè.

P'en deus kavet kamaraded, e-barzh un davarn bennag,
Meur a vanne en deus evet, 'vit lakaat e gof distag

Pa 'z ae d'ar pardonioù, e vez' atav mezv-dall
Prest e oa da goll e vragoù, e Landerne an deiz all

Pa zeuio ar c'hiz er vro-mañ, da derriñ an dimezioù
Hi a yelo en ur ganañ, pell diouzh paotred ar pilhouè

Pa zeuio karrig an Ankou, d'ober e dro er vro-mañ
'z aio Monig war e roudoù, hag e pedo d'e sammañ

Pa vo marv he zamm aotrou, ha lipet gantañ e loa,
Monig e-lec'h lezel klemmoù, a gano « d'an toull ez a ! »

Autre dernier couplet

Komzet 'vo d'an aotrou Person, eus flaerius pilhaouer
'Vit ma kano al libera, hag ouzhpenn Son al lonker

Vocabulaire

sailhat=bondir, drailhañ=hacher, tanañ=allumer, korn-butun=pipe, krog pouezer=crochet à peser, lezel=laisser, glac'hariñ=affliger, skuilhañ=verser, daerouè=larmes, giz=mode, tradition, roudoù=direction, pediñ=prier, sammañ=emporter, lipat=lécher, klemm=plainte